




PHOTO JOS LE DOARÉ

Bleun-Brug

Niv. 60 (Mensuel)

Abonnement : 500 Francs

Mezeven 1953

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1953 ?

An darn vrasa eus hon lennerien a zo echu o c'houmanant. O fed start a reomp eta da baea o c'houmanant nevez raktal, pe da lavaret d'eomp ne gemerint mui ar gelaouenn.

Koumanant bloaz : 500 lur.
Koumanant a enor : 600 lur.
Madoberour : 1.000 lur.

An Ao. Visant SÊITÉ, Sekretour ar Bleun-Brug, a zo bremañ distro en hon touez e Kastellin.

Kas an arc'hant da : V. SÊITÉ, Bleun-Brug, Ty-Carré, Châteaulin, C.C.P. 544-22 Nantes — hag ar skridou da : M. l'abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).

TAOLENN

Bleun-Brug - Jun 1953

Sommaire

Hor Mammou	1
Landevenneg	2
Prezegenn an Ao. Favé e Landevenneg	4
Bleun-Brug Boulvriag	6
M'ho tesko	8
Al loar en dervenn vras	10
Ar sportou	11
Hon c'haocadenn da zul	14
An Aotrou Henry, eus Lennon	15
Ma gwenaneg	16
Ar re a ouelomp	17



133672

HOR MAMMOU

GOUEL mammou an douar eo a gloz, er bloa-man, miz Mae, ar miz kaer, bet gouestlet, en e bez, da enori hor mamm eus an nenv, an Itron Varia.

Dant a ra da zigas sonj d'eomp eus ar pezh m'eo bet hor mamm evidomp.

Eurus, a lavarer, an neb en deus bet eur vamm vat.

Piou ac'hanomp n'en deus ket bet eur vamm vat ?

Dleour omp d'ezi eus kement a draou !

Hi eo he deus roet d'eomp ha miret ennomp ar vuhez.

Noz-deiz, epad miziou ha bloaveziou he deus beilhet warnomp ha pourveet da gement hon doa ezomm evit kreski ha dont da zen.

Kemeret en deus warni an holl boaniou a c'helle espern d'eomp evit lezel ganeomp hepken ar joa.

Koulskoude pep hini ac'hanomp a zo dleour d'e vamm eus eur mad presiusoc'h c'hoaz eget buhez e gorf. Bez ez eo e feiz hag e furnez. Ar vamm eo a ra an den. Ar pep wella eus ar pezh a zo ennomp breman a zo bet hadet en hon ene gant hor mamm.

An holl dud o deus graet vad d'o nesa, hag enor d'an Iliz, ha d'o bro, an dud desketa ha santela, pa vez goulennet diganto penaos int bet hentchet ha troet ouz ar mad, a lavar atao : « Gant va mamm eo ! A, pebez maouez n'oa ket ! »

Eur pikol leor kaer a ve gellet skriva gant ar pezh o deus lavaret diwar he fenn.

Hor mamm eo gant he mouez'hoarz dudius, dre he c'harantez hep muzul, he deus lakaet dirazomp ar skeudenn veo eus madelez ha karan-tez Doue evidomp.

Anaout hag anzav a rankomp holl n'hor beus ket he c'haret a-walc'h hag hor beus resevet diganti mil gwech muioc'h eget n'hon deus roet d'ezi.

O terc'hel sonj eus kement-se, Gouel ar Mammou a die rei tro d'eomp da ziskouez ha da ziskleria d'an hini a zo bet hor mamm hon holl anaoudegez vat, hag hor c'harantez entanet ; tro ouspenn da zont da veza gwelloc'h hon unan.

Ha perak, arak ma vezo klozet miz ar Werc'hez, ar Vamm dreist pep mamm, ne c'houlennfemp ket diganti miret d'eomp mammou kristen ha mammou breizat, a valeo war roudou hor mammou koz, hervez spered ha furnez hor gouenn, a ouezo kana d'o bugaligou soniou kaer Breiz Izel...

« O Itron Varia Vreiz, rouanez an tiegeziou kristen, bezit eur wech c'hoaz an hini a deu da adsevel ar pezh a venner diskar, ar pezh a ra enor ha gened hor c'hornig douar. C'houi hag a zo hag a vezo hor buhez, hon dudi hag hor fizians. »

L. B.

Lanndevenneg

« Eul lec'h zo e Breiz,
« Eul lec'h dispar ha kaer meurbet,
« 'Vel ne gaver neblec'h ebet...
« Ar c'henta 'wel ar bleuniou
« D'an nevez-amzer o tigeri,
« An diweza 'wel an deliou
« D'an diskar-amzer o veleni...
« Anvet eo al lec'h dispar-se,
« Lanndevenneg, Lann-Wenole. »

Evelse e kane ar barz da geñver an deiz ma tarzas dre ar bed ar c'helou laouen, edo abati koz Lanndevenneg o vont da adsevel e vogerioù koz.

Edo neuze o c'houlaoui war Vreiz, Bleun-Brug bras ar sent e Kastell-Paol :
1950 :

« Dirak an holl sent koz,
« An Tad Abad, war lein ar roz,
« A-wel d'ar mor glas,
« En deus embannet, e-kreiz an nöz,
« Ar c'helou bras :
« — Klevit, Breudeur a Geltia,
« Klevit holl gant joa,
« Alleluia !
« Ho manati karet
« A vo adsavet.
« Dre c'hras Doue,
« Adsavet vo adarre,
« Lanndevenneg, Lann-Wenole. »

Ma tride kalon ar Bleun-Brug gant ar c'helou-se, hirio an deiz e c'hell tridal muioc'h c'hoaz. Ar c'helou n'eo mui eur promesa, met eun dra gwirion. Abaoue an 10 a viz Mae, evel lilienn vuzudus ar Folgoat o sevel war bez ar paour-kéz Salaun ar Foll, emañ savet ivez eus an douar diazevou Abati nevez Lann-Wenole.

An aotrou kardinal Roques, arc'heskob Roazon en deus, en deiz-se, benniget ar maen kenta, ha siellet ennañ ar skridenn a zalc'ho an envor eus an darvoud bras-se, ar pouezusa eus istor Breiz en amzerioù a vevomp :

« Bretoned, Mignoned,
« Breudeur,
« Kelted a Vreiz-Vihan, kelted a Vreiz-Veur,
« Tridomp gant levez :
« Ra dregerno pep helkleo
« A venez da venez
« Gant hor youc'hadeq,
« Rak adsavet eo
« A varo da veo
« Lanndevenneg ! »

Ha klevout a ran o tridal, n'eo ket hepken Breiz an douar, met ivez Breiz ar Baradoz, dreist-holl an hini a zo bet da genta o lakaat brall e kloc'h an adsav : an aotrou Yann-Vari Perrot.

Klevit 'ta petra 'lavare e 1935, da geñver milved bloaz adsavidigez kenta an abati koz, e 935, warlerc'h reuz bras an Normaned.

Prezeg a rae e-kreiz an dismantrou, hag e youc'he d'ar Vretoned a oa eno dirazañ, Bretoned ar Bleun-Brug.

...« Bremañ ez eus mil bloas, mogerioù an iliz-mañ, a vir beziou ar roue Gralon hag an abad santel Gwenole, a oa diskaret izeloc'h c'hoaz eget m'int bremañ : *adsavet in bet*. »

« Ar vro, eus an eil penn d'egile, a oa flastret gwasoc'h c'hoaz eget m'eo bremañ : *adsavet eo bet* ! »

« Perak, Bretoned, ne rafemp-ni ket en XX-vet kantved ar pezh o deus graet hon Tadoù en X-vet kantved ? »

« Ar gwad a red en hor gwazied a zo heñvel mat atao ouz an hini a rede en o re : gouest mat omp, gant skoazell hor sent koz da ober ar pezh o deus graet, ma karomp en em glevet da vad, ni holl hag hon eus da welet war ar vugale — tadoù ha mammou, mistri ha mestrezed-skol, beleien ar parrezioù — evit o lakaat a-zevri, da anaout ha da garet evel m'eo deet, an teñzorioù estlammus ha kuzet d'an darn vrasa eus an dud, a zo en o feiz kristen hag en o yez venniget... »

Piou a lavaro n'eus ket aze evel eun diougan, eur « profesi » eus ar pezh a welomp, ni, gant hon daoulagad hon unan ?

Doue a zo teurvezet gantañ ober ar burzud a c'houlennomp abaoe mil bell 'zo, hag en deus en em servichet evit-se, eus eun den hag emañ warnañ o para holl sellou ar Vretoned ; eun den hag a zo gantañ, evel sant Gwenole, eur strollad diskibien : an Tad Abad Felix Colliot hag e venec'h a Gerbeneat.

Tad ker, eur gwall labour eo, an hini hoc'h eus kroget gantañ, met bezit dienkreiz : an holl Vretoned a zo ganeoc'h : Bretoned an douar ha Bretoned ar Baradoz. Re all en ho raok, evel Yann Lanndevenneg, ar manac'h eveldoc'h, o deus kroget gant labour gwasoc'h c'hoaz, ha deuet int bet a-benn eus o zaol. Pa vez feiz divrall, ne c'hell beza netra hag a virfe tizout ar pal...

Gwelet hoc'h eus dija kalon vat ar Vretoned ; gwelet hoc'h eus poblou a-bez, meur a wech a-benn bremañ, o tisedek da Lanndevenneg, evel ma tire-dont da Santez-Anna, d'ar Folgoat, da Rumengol, da Landreger... ha dont a raint muioc'h c'hoaz en amzer da zont.

Dont a raint da Lanndevenneg, da glask, er sioulder hag er bedenn, freal-zidigez ha pinvidigez d'o ene. Dont a raint da glask sklerijenn d'o spered, war draou ar bed-mañ, Breiz dreist-holl, ha war draou ar bed all.

Bez e ranko beza ho manati, eun tour-tan, met eun tour-tan da genta evit ar Vretoned.

Hounnez eo an destenn en deus, an aotrou chaloni Fave, aluzenner-meur ar Bleun-Brug, displeget sklér en e zarmoun, e Lanndevenneg.

Nag eo gwir ar pezh en deus lavaret !

V. Seite.

Kantig adsavidigez Lanndevenneg

Air : *Bale Arzur*.

DISKAN
Abati koz Sant Gwenole
A zav hirio eus doun ar be',
Kanomp mil bennoz da Zoue !

1
Eman ar bed o nevezi,
Ar bleuniou kaer o tigeri :
Gwelit-i jaouen o skedi.

2
Gant tarz an deiz, en ear mintin,
Holl gleier Pask a son sklintin,
An evnigou a gan lirin.

3
An Aotrou Jezuz, eus ar c'heo,
Da vintin Pask, dasorc'het eo,
Ha savet a varo da veo.

4
Eman douar an Abati,
Dindan gliz santel miz Mari,
Dispar, o vleunia, o c'hlaizi...

5
Lanndevenneg, tour-tan d'hor Feiz,
A skub an noz, a strink an deiz,
Te 'vo warc'hoaz, Baradoz Breiz !

LAOUENANIG BREIZ.

Prezegenn an Ao. Chaloni FAVE, e Landevenneg

*Fili hominis, putasne vivent ossa ista ?
(Ezech., 37/3.)*

*Fils d'homme, ces ossements revivront-ils ?
— Je dis, Seigneur Yahweh, tu le sais.*

EMINENCE,
EXCELLENCES,
RÉVÉRENDISSIMES PÈRES,
MES FRÈRES,

Le prophète Ezéchiel fut transporté un jour par Dieu au milieu d'une plaine couverte d'ossements desséchés. Dieu lui dit : « Fils d'homme, ces ossements revivront-ils ? » Le prophète répondit : « Seigneur Yahweh, tu le sais ! ». Prophétise sur ces ossements et dis leur : « Ossements desséchés écoutez la parole de Yahweh, voici que je vais faire entrer en vous l'esprit et vous revivrez ». Ezéchiel prophétisa et les ossements reprirent vie et ils se dressèrent debout, grande, très grande armée.

« Ces ossements revivront-ils ? » Combien de fois ces paroles ne sont-elles pas venues à l'esprit du touriste et surtout du pèlerin visitant les ruines de l'antique monastère de Landevenneg, abandonné depuis la Révolution : ces ruines se relèveront-elles un jour ? La vie de prière, de pénitence et d'étude des moines reprendra-t-elle son cours interrompu, sur cette terre sainte qui fut le foyer de rayonnement spirituel le plus puissant de Bretagne ? »

Les dévots de Saint Guénolé et de Landevenneg répondaient : « Tu le sais Seigneur ! » avec une espérance qui d'année en année s'affermissait et s'étendait jusqu'à ce jour d'Août 1950 où la reconstruction fut décidée.

...Du monastère de Saint-Budoc, dans l'île de Lavré, près de Bréhat, sortira Guénolé. Né en Armorique, fils d'émigrants, Fragan et Gwenn, Guénolé est confié de bonne heure à l'école monastique de Lavré. A 22 ans, il quitte Saint-Budoc avec onze moines pour s'établir à Ti-Bidy, puis à Landevenneg et le monastère de Landevenneg surpassera tous les autres par son élan apostolique.

Alors que la plupart des moines avaient évangélisé surtout l'Armor, région la plus peuplée, les disciples de Saint Guénolé s'enfoncent hardiment dans l'Argoat, la Bretagne intérieure, à la population plus dispersée, et plus attardée dans son paganisme, moins mélangée d'émigrants Celto-Bretons. La piété populaire nous a conservé les noms de ces missionnaires : Cōnogan à Beuzit, près Landerneau, les fils Catmaël à Roscanvel, Balai et Martin à Irvillac, Idunet à Châteaulin, Dei à Lothey, Wigon à Trégourez, Tanvoud et Rōsian dans les cantons de Coray, de Scaër, du Faouët, Rioc à Lanriec, etc... C'est tout le territoire de Gradlon que Landevenneg comme un phare puissant balaiera de sa lumière, pendant que Tudi et Gunthiern évangéliseront le Sud et le Sud-Est.

Montalembert écrira que Landevenneg, « le plus ancien et le plus célèbre sanctuaire armoricain, devint le foyer le plus actif de la propagande chrétienne, en même temps que du travail manuel et littéraire dans la Gaule Occidentale ».

Et le phare de Landevenneg, comme les autres, s'est éteint, les ténèbres se sont étendues sur la Bretagne...

...En 1790, la Révolution sonne de nouveau le glas de Landevenneg, les moines sont dispersés et le monastère abandonné.

Encore une fois, la Bretagne pleure ses moines ; mais elle garde l'espoir de les voir revenir.

En 1878, les Bénédictins fondent Kerbénéat sur la demande de l'Evêque de Quimper et de Léon, Mgr Nouvel de La Flèche, ancien bénédictin de la Pierre-qui-Vire, mais nous n'avons pas Landevenneg.

Cependant on travaille silencieusement pour le retour.

En 1935, le Bleun-Brug tient ses assises annuelles à Pleyben. Au lendemain de la journée populaire, le mercredi 4 Septembre, le Comité du Bleun-Brug invite la Bretagne à se rendre à Landevenneg pour célébrer le millénaire de la restauration par les soins de l'abbé Jean. La grand'messe est chantée dans les ruines par le R. P. Gaudu, bénédictin, M. le chanoine Uguen, curé de Plou-gastel-Daoulas, fait le sermon de circonstance, et M. l'abbé Perrot, directeur du Bleun-Brug, clôture la fête en disant :

« Voilà mille ans passés, les murs de cette église, qui conserve les tombeaux du grand roi Gradlon et du saint Abbé Guénolé, se trouvaient être dans un état de délabrement plus lamentable encore qu'aujourd'hui et on a relevé les ruines. Pourquoi, Bretons, ne réaliserions-nous pas au 20^e siècle ce que nos pères ont accompli au 10^e ? »

Cette cérémonie et ces paroles éclatent comme un éclair, ranimant l'espérance. On croit entendre sous le souffle du prophète Ezéchiel comme le premier frémissement des ossements desséchés.

Ce jour-là, la Bretagne catholique lève officiellement la prescription qui pesait sur les ruines de Landevenneg, prescription qu'elle n'avait jamais acceptée dans le secret de son cœur : l'Abbaye de Landevenneg serait restaurée dans sa splendeur, matériellement et spirituellement, à l'heure marquée par la Providence, et cette restauration, comme mille ans plus tôt, serait l'œuvre de la Bretagne, pour la gloire de Dieu, pour la joie et la fierté des Bretons qui retrouveront ici, plus vivant que jamais, l'antique foyer de prière, de pénitence, d'apostolat et de culture bretonne. En 1936, une quinzaine de moines de Kerbénéat, sous la direction de leur prier, le R. P. Félix, se rendent en pèlerinage aux ruines de Landevenneg et chantent l'office dans l'ancien chœur des moines. « Oui ! il faut revenir à Landevenneg ! » et déjà il facilite les voies à la Providence, il prépare l'opinion et sa communauté pour la grande œuvre de restauration.

Voici que la décision est prise.

Au Bleun-Brug de 1950, devant la Bretagne catholique rassemblée à Saint-Pol-de-Léon, autour des reliques des neuf Saints qui fondèrent ou illustrèrent les neuf évêchés de Bretagne, le Révérendissime Père Abbé de Kerbénéat, futur Abbé de Landevenneg, lançait dans la nuit l'appel à la grande croisade :

« La Providence a parlé, nous allons avec le concours de tous, Bretons du terroir et Bretons de la dispersion, rebâtir Landevenneg. »

Et c'est ainsi que le millénaire que nous célébrons n'est pas le geste vain d'un peuple vieilli, tourné vers son passé ; c'est une célébration féconde, pleine de jeunesse et de hardiesse, tournée vers l'avenir. Nous sommes ici rassemblés pour fêter un millénaire qui est en même temps une résurrection.

...Nous voulons chanter aujourd'hui l'allégresse de nos cœurs parce que nous estimons que nous vivons un événement capital dans l'histoire de la Bretagne catholique. Tout nous confirme dans cette opinion : la présence de Notre Cardinal, entouré de nos Evêques, des Abbés de nos monastères, de la foule que vous représentez, mes bien chers Frères, sans compter tous ceux qui, même de loin, de très loin, sont de cœur avec nous aujourd'hui.

Notre petite patrie est engagée dans une période décisive. Elle se trouve en pleine crise de croissance humaine et son évolution est si rapide que l'observateur de l'extérieur en éprouve comme une angoisse. Emportée comme par une tornade, la Bretagne de demain sera-t-elle encore la Bretagne et la Bretagne chrétienne ?

Dans ces conjonctures que nous apporte Landevenneg ?

Comme tous les monastères : un centre de prière, un foyer de rayonnement spirituel, un centre de culture humaine et chrétienne.

M. le chanoine Favé développe alors ces trois points et termine par un appel à toute la Bretagne pour la restauration de cet « antique foyer de prière, de pénitence et de culture ».

Bleun-Brug Boulvriag

SETU digor adarre amzer gouelioù ar Bleun-Brug, rak abaoe warlene hon eus meur a Vleun-Brug hep bloaz.

Hini Boulvriag, da sul ar Pantekost, eo bet an hini kenta er bloaz-mañ. Evel Bleun-Brugou Pent-e-Kroaz, Plougerne, Baod'ha Gwennrann, warlene, eo bet gantañ, kaer kenañ an traou.

Boulvriag, eus eskopti koz Landreger, hirio, e eskopti Sant-Brieg, a zo eur vro gaer kenañ, hanter hent, war an tu dehou pa'z aer eus Keraheez da Wennkamp.

Iliz ar barrez a zo koz bras, warni merk ar bloaveziou, azalek an X^e kantved, betek an 19^e. An tour, ar beg anezañ eus ar bloaz 1868, a zo unan eus kaera touriou Breiz-Izel, d'ezañ war-dro tri-ugent metr uhelder.

Digas a ra an iliz-se da soñj eus sant Briag, a zeuas di da c'hom, er pempvet kantved, eus Bro-Iwerzon.

Eur manac'h e oa; gounit a reas grad vat mestr ar vro, ar c'hont Derok, a roas d'ezañ douarou, d'ezo war-dro eul leo dro. Eno e savas eur manati, hag eno ivez e varvas. Gwelet a reer c'hoaz, en iliz, al laouër vaen a servichas d'ezañ da arched.

Pardon sant Briag, da zeiz a yaou-Bask, a zo c'hommet brudet mat er c'hornbro. En e enor e raer eur brosesion, en-dro d'an douarou a oa d'ezañ, a vez anvet al leo-dro. Eun droveni eo, heñvel a-walc'h ouz hini Lokronan hag hini Landelo.

N'eo ket hep abeg, evel a weler, eo bet dibabet al lec'h-se da sevel Bleun-Brug Bro-Dreger.

Bez 'ez eus eno ouspenn, eur C'helc'h-Keltiek a spered breizat, renet gant eun den ken breizat all, an Aotrou ar Sant, kure, skoazellet gant an ao. Kadoudal, eur stourmer abaoe pell 'zo.

Ar re-mañ eo a lakas ar Bleun-Brug ken brao war-sao, hag a reas anezañ unan eus kaera gouelioù bet gwelet er vro.

D'ar sadorn da noz, war eur podium sklerijennet kaer, dirak an iliz, e voe diskleriet gant paotred ar C'helc'h, « Mister sant Briag », pezh-c'hoari gant Dirina-dorr, e tri-arvest. Etre an arvestou, kelc'h Poullaouen, renet gant Loeiz Roparz a roas eun tañva eus kanaouennoù ha dansou « Pastoral Poullaouen » a vo ivez c'hoariet er Bleun-Brug bras, d'an 2 a viz Eost, e Kastellin.

Warlec'h e voe prosesion ar gouloù hag an ofereñn hanter-noz, lavaret gant an aotrou Person Boulvriag ha prezeget gant an aotrou Keranflech, person Sant-Nikolas-ar-Pèlem.

Pep tra, en noz-se, a oa sioul ha dispar : ar stered, al loar, ar gouleier, ar c'hanaouennoù, ar c'homzou... Edo evel ene ar sent koz o plava war an holl, o leunia ar c'halonou.

An deiz a voe kaeroc'h c'hoaz. Azalek eiz eur hanter e voe bec'h e skol ar seurezed gant ar c'henstrivadegoù, koulz re ar re-vihan ha re ar re vras.

Evit ar prezegrez ez eas an daou briz kenta gant Pöleta Hélardeus Tremargat, hag Hervé ar Ray, eus Purit-Kintin.

Evit ar c'hana, eo aet ar maout gant laz-kana Perroz, ha Job an Dû eus ar Vouster. Ar memes hini, ha Jerard Boulc'h eus Glomel a drec'has evit ar Rimadellou.

Gant ar vugale e voe startoc'h an traou, niverus evel ma oant.

Ar maout a yeas, evit al *lenn* : gant Razavet eus Bulien, ar Pivert eus Plijidi ha Roparz Rannou eus Plijidi ive. — Evit an *displega* : gant ar Fevr eus Tremargat, Bodiou eus Bulien, Rouzot eus Bear, Jozeta Menou eus Bulien, Annaig Jeron, eus Tremargat, ha Jannin Rivoallan eus Sant-Konan. — Evit ar *c'hana* : gant Denis Jeron hag Ivon ar Fevr eus Tremargat, Mari Nocla ar Fevr hag Annaig Jeron eus Tremargat ha Janin Kistin eus Boulvriag.

Ar re-mañ a zo pedet holl da zont da Gastellin, d'an 2 a viz Eost, da gaout krogad ouz Leoniz, Kerneviz ha Gwenediz.

Da unek eur an ofereñn-bred a voe kanet gant an ao. Brochen, vikel-vras Sant-Brieg, ha prezeget gant an ao. Klerk, person Bulien. Ar c'han, gant kanerien Leon, eus Landi, renet gant an ao. Abjean, a voe eun drugar da glevet.

Goude eur gwin a enor kinniget gant an ao. Maer, an holl en em gavas evit ar pred e skol gristen an ao. Bonniég. Mat e voe ar pred ha laouen an dud. An ao. Cadoudal a ginnigas gourc'homennou mat d'an holl, hag an ao. Brochen a veulas an ao. Y.-V. Perrot diazezeur ar Bleun-Brug.

Ar gouel goude merenn.

An abadenn vras « Koroll ha Kan » a voe adarre war ar blasenn, dirak eur mor a dud. Eno, epad diw eur hanter, n'eo ket plijadur a vankas, m'hel lavar d'eo'h, nag evit an daoulagad, nag evit an diskouarn. Klevet e voe kanerien Leon, Perroz, Gwengamp, Plevin ; kelc'hioù Boulvriag, Poullaouen, Montroulez, Rozdren, Perroz ha Plouaret a gorollas.

Met ar pezh kaera a voe gwelet goude merenn, eo prosesion vras al « leo-dro ». Tost da zaou-ugent parrez a oa deuet gant o skeudennou koz, o bannie-Hervé.

Tremen a reas ar brosesion, pep parrez o kana kantig he sant patron, dre zindan ar garlanteziou stignet kaer dre ar ruiou, evit mont goude e-touez ar glazur dre ar parkeier hag an henchou glas. Pedi a rae an dud dre o c'hantikou a youc'hent a-bouez penn, met ivez dre o dilhajou kaer, ha dre ar skuizder a c'houzanvent o tougenn skeudennou pe bannielou ken pounner e-doug an Droveni hir.

Bennoz ar Sakramant a voe roet war ar blasenn, hag an Aotrou'n eskob a glozas ar gouel gant eur ger mat hag a voe evel boked an deiz kaer m'eo bet Bleun-Brug Boulvriag.

Meuleudi da dud Boulvriag, ha breman kenavo ar Bleun-Brug e Kastellin d'an daou zevez kenta a viz Eost.

V. Y.



KANVOU

Gwall skoet eo bet an emzao breizek gant an ankou, e-doug ar bloaz a ren. Goude an Aotrou Conq, ha Tangi Malmanche, Doue r'o fardono, setu nevez aet ive da anaon, hor mignon mat ha stourmer koz, an Aotrou Loeiz Herrieu.

Piou a lavaro biken ar pezh a dleomp d'an den-se hag a zo bet ken heñvel e vuhez ouz hini hor mestr an Ao. Yann-Vari Perrot. Graet en deus, e-pad ouspenn hanter kant vloaz, e Bro-Wened, ar pezh en deus bet graet hemañ e Leon hag e Kerne. Eveldañ en deus bet da c'houzañv poaniou bras, displeaded, kasoni, fallagriez, ha se a-eneb pep gwir. Unan eus izili pouezusa ar Bleun-Brug eo bet e-doug ar wech. Skriva 'raimp amañ e vuhez.

Ra bedo evitañ hor mignoned, evit ma kavo e Baradoz Doue, an eürusted hag ar peoc'h gwirion bet nac'het outañ gant ar bed. Ha ra vo e skouer, evi-domp holl, eun nerz da vont bepred war-raok.

Doue ra bardono d'e anaon.

V. S.

M'HO TESKO !...

An den yaouank, eas awalc'h, a zo troet « d'en em gaout », evel ma lavar ar c'herne, en em gaout gwell eget na 'z eo, en em gaout dreist ar re all, ha disprijout ar re goz.

Setu aman eur gont hag a zo bet great d'in, n'eus ket peil, gant... lakomp Jakez, eur c'hamarad soudard.

D'ar mare ma stlejemp ar zac'h hag ar fuzuilh skoaz ha skoaz war hentchou diskompez ar brezel bras, Jakez, ha n'oa ket c'hoaz 20 vloaz, a oa eur pabor anezan : ment vat, bras zo ken, sounn evel eun tach war diou c'har turniet mat, reut e vruched reut e vragez, livet yac'h ha koant war ar marc'had. Eun den kaër !

Didrouz ivez. N'eo ket hen en dije klasket trabas da genta. Arabat e vije bet, ken nebeut all, bresa d'ezan e vizied treid. E nervernou raktal a veze gwelet o labourat ha pa grogje en eur parizian bennak — re skanv a deod awechou — meudou Jakez, dizamant, a laoskje o roudou.

36 vloaz a zo eat a-biou. Evel ar re all en e oad, Jakez n'eo mui pôtr yaouank. Den awalc'h eo chomet, hag hen diskouez a reas nevez' zo.

D'an ostaleri oa eat en dervez-ze gant e vreur kaër. Oh ! n'eo ket Jakez an hini a gollo e yec'hed nag e benn o lipat ar werenn. Eur banne, pa vez ret, evit ober ar c'hiz, hag echu. Keit ha ma skoe ar re all war ar gwin ruz, Jakez ne c'houlenne nemet... dour Vichy.

Ma stagas eur beg bras bennak — eun 30 vloaz den, e kreiz e vrud diouz an doare — d'e c'hwapaat ha d'ober an heg outan.

— « Kleo ! dour Vichy ! Eun evaj merc'hed ! Dister ar stal ganez, pôtr koz, pa ne c'hellez ken eva nemet Vichy. Emaout o vont d'ar bern !... »

— « Pôtr koz, eme Jakez, ar gwad o sevel d'e benn, petra vank ar pôtr koz man d'it-te ? Divergont ma 'z out ! Koulz ha te bennez ! Deus 'ta da blega ar pougnez ouzin-me hag e vo gwelet petra out !... »

Ha setu ar pôtr koz hag ar pôtr yaouank unan a bep tu d'eun daol-zomino, an ilinou war an daol, an diou graban skoulmet start an eil en eben.

— Prest out ? eme Jakez.

— Pa gari !

— Ha Jakez ober ar frap kenta. Dioustu ec'h en em zantas ar barreka.

— « Lakaat a c'hellez da zaou zourn, kamarad.

— Tra'alc'h a vezo gant unan !

— Prest out ? eme Jakez eun eil gwech, e c'hwad o virvi, gwenn evel ar paper.

— Prest oun ! »

Ha beac'h adarre. Eur pennad e chachont a varo ; unan o poueza, egile oc'h enebi. Awechou Jakez a zebant leuskeur e vrec'h da vont ; awechou all eo breac'h egile a ziskenn.

Start an traou ! An ostiz breman hag ar voazed all a zo bodet endro d'an daou stourmer.

— « Tostaït mat hoc'h ilinou. Ata Jakez, n'eo ket ouspen d'it ! Ata pôtr yaouank, pelec'h eman da nerz ?.. »

Eman Jakez en e wella. E ilin a stag war an daol, ken e wan dindannan ; en e alzourn askorniek e klever an nervernou o rigougnat ; wazennou e c'houzoug a c'houez, a zifoup.

Ar pôtr yaouank a gavo diacs plega. Diskrougnal a ra e zent en e benn, e zourn kleiz a zo peg e starn an daol, e vizied treid dre zol e voutou a glask harp d'e gorf a-bez. Allaz ! re skanv eo e boueziou. Kaër en deus stourm hag enebi, Jakez a wash hag a wash atao, m'eo skuizet ar pôtr faro. Tamm ha tamm e ilin a rikl, a bella, a zistag diouz an daol. Eur frapad all, an diweza, setu

breac'h an den yaouank cün-tenn, hag e zourn da rei eur pok kalet d'ar c'hoat, hanter vrevet etre meudou dir ar pôtr koz.

— « Alo, ostiz, eul litrad gwin war ar c'hontouer, eme Jakez, me a bae ! N'eo ket dour Vichy eo en taol-man !

Te avat, pôtr yaouank, n'ec'h eus netra da gaout. Kerz breman d'ar gear ha lavar d'az famm ober d'it alies yod kerc'h da grenvaat. Kerz eus va daoulagad ha bez kioz da riboulou !

Hag hiviziken pa weli pennou gwenn evel va hini-me war da hent, laosk anezo da vale, didrabas, gant aoun na vije c'houezet d'it c'hoaz da fri eur wech all. »

S. S.



Arabat morse fallgaloni

Daou wesklez, Julig hag Yfig, a oa oc'h ober eun tamm tro, ha setu ma kouezjont, a-daol trumm, en eur zailhad laez livriz.

Julig a oa eur spered debret, atao o-kunudi ha prest da goll kalon an distera tra a stourme outan.

Yfig, avat, a oa eur gwaz anezan. Pa zave bec'h, e ouie atao chacha an ibil mat gantan.

Julig eta, pa welas e pelec'h e oa kouezet, a youc'has en eun doare truezus, hag o welout n'helle ket lammat er-mêz eus ar zailh, en taol kenta, a fallgalonas hag e voe beuzet.

Yfig, hen, a zonje :

« Perak, en em jala kement all, beo oun c'hoaz..., en em zifretomp eta. »

Hag e lammas a-gleiz hag e lammas a-zehou kement ma troas an dienn en amann ; hag eur wech m'en doa gellet en em harpa war e bezenn amann a reas eul lamm diwarni, er-mêz eus ar zailh !

Evel dan, tudou, ne fallgalonit morse.



LEVRIG-NEVEZ

Hor mignon hag hor c'nenlabourer mat, *Yeun ar Gow*, a zo paouez embann « *Pedennou evit eun noz-veilh gant eun den maro* » eul levrig koant, aes da lakaat er godell, ennan eun dornad pedennou ha kenteliou kaer, diouz doare beza lennet, epad beilhadenn ar re varo.

Dleet eo e ve skignet al levrig-se, dre ar parrezioù, da genver ar misionou ha retrejou, evit ma chomo beo en hon touez ar c'hiz santel eus an nozvezioù-beilh kristen ha brezonek.

(Her goulenn digant *Yeun ar Gow*, Gouezec.)

E gwerz e ti Le Dauk, levrier, rue René-Madec, e Kemper.

Kont Post 111-78 Naoned. — 100 lur ar pezh, pe 650 lur an 10 skouerenn

AL LOAR EN DERVEN VRAS

Sell eta, sell mat, ma mignon,
Eur skeudennig plijus eston !
Sell eta, sell spis adarre,
Kaeroc'h taolenn 'vit eun huñvre !

Ha gwir, ha n'eo ket eun dudi
Gwelout al loar 'vel eun « Hosti » ?
Bég an dervenn e-tal an tour,
O pegen kaer an « Ostansour » !

An noz, a gav d'in, 'zo eun iliz
Pa gousk ar bed, pa gouez ar gliz.
An noz a zo eun iliz-veur,
Al loar velen eo ar c'hleuzeur.

An noz a zo eur rouanez,
War he mantell, nag a berlez !
Ar paour-kaez den 'goll e spered
O klask niveri ar stered.

Gwelomp, gwelomp pelec'h 'mañ 'l loar ;
'Mañ o tiskenn rez an douar,
Rez an douar eo diskennet,
An dervenn hec'h unan manet (= chomet)

Hec'h-unan penn e-touez ar plant,
Aet da netra, 'giz eur seblant,
Kollet ganti he luf ha gloar
P'he deus kollet « Hosti » al loar.

Ha te, ma breur, kerz da vuhe(z),
Te, splann ivez, ra gar Doue,
Pa boz eur pennadig ez ti
Dindan mantellig eun Hosti.

Tec'het Jezuz, allaz, allaz !
Da vuhez-den a zo divlaz,
Evidon-me ne dalv netra
Pa n'eo maget gant gwir « Vara ».

Eur Mignon.

En eur zigas d'comp e vleunennig, ar mignon a skriv kement-man :
« Heman moarvat a vezo ma fennad diveza evit « Bleun-Brug » karet, karet.
War disterat bemdez ! Vel ma vezo, bolonte Doue ! Me garfe klevout ar c'horn
boud o tregerni dre Vreiz da hopal d'ar Mammou, en an' Doue komz brezoneg
d'o bugale.

An holl gelaouennou a dlefe terri o fenn d'ar Vretoned gant ar gaoz-se.

« Ar brezoneg mar befe trec'het
Ouspenn d'ar vez e vefe pec'het
Ra zalc'ho « Bleun-Brug »
Da sklerijenni an dud !
Doue ha Breiz hag ar Brezoneg !! »

Kenteliou d'an dud yaouank

Ar sportou.

ARAOK ar brezel bras, an dud diwar ar maez ne ouient ket piou oa lijera
den a oa er bed, na pet munutenn a laker evit ober nao c'hant pe vil
metr, na pegeit e laka hemañ pe henhont evit ober kant kilometr war e
vare'h-houarn ; ar pezh ne viras ket outo da gaout an trec'h. Hizio ar yaouanki-
zou a zo eun tamm mat troetoc'h da zeski an traou-ze eget da ziskuiza ha da
vaga o spered o lenn kazetennou, kelaouennou, levriou fur ; ar pezh n'en deus
ket miret outo da goll ar brezel diweza.

Eun dra ret eo entent ouz buhez ar c'horf ; ar yaouankizou a zo en eun
oad danjerus ; birvi a ra ar gwad en o gwazied ha d'eo eo hen distana ; birvi
a ra ivez enno froudennou ar spered ; al labour-korf a zo eul louzou dreist
evit distana ar galon hag ar spered ; skuizder warlec'h labourat war ar maez
a zo yac'hus hag epad al labour n'emañ ket ar spered o redek a gleiz hag a
zehou.

Al labourer douar a ra awalc'h a sport : bemdez o skarza ar grevier, o karga
teil, o kempenn keuneud, oc'h arat, o falc'hat. Ha kontet ho peus pet leo bem-
dez a ra o vont eus e di d'e bark, o vont eus an eil penn d'egile d'e bark da heul
an alor ? Ha kontet ho peus pet litrad aer vat a zo en em zilet en e wazied
epad c'houec'h dervez eus eur seurt micher ? Goude c'houec'h devez labour,
eun ehan a zo ret.

Elec'h ehana petra 'ra ar baotred yaouank breman ?

Mont pell diouz ar gêr evit en em skuiza c'hoaz o c'hoari foot-ball. Holl en
em roont d'an hevelep c'hoari pe int-i a zo bras, pe int-i a zo bihan ; pe int-i o
deus diwesker hir pe int-i o deus diwesker berr ; pe int-i o deus eur galon
yac'h pe int-i o deus eur galon direiz. Ha koulskoude n'o deus ket holl an
hevelep nerz ha n'int ket graet holl gant an hevelep dañvez. Kant den, kant
korf ; ne vez graet en o zouez dibab ebet gant eur medisin ha setu perak spor-
tou a zo ; ar football da genta, hag a ra muioc'h a zroug eget a vad da eleiz a
baotred yaouank. N'eo ket c'hoariou hag a ro tro d'en em skuiza kalz eo a zo
ezomm da sul, mat c'hoariou skañv hag a roio tro d'hor yaouankizou da zis-
kouez o ampartiz. C'hoariou a zo evel ar c'hoari boulou, kilhou, galoch, saez,
jimnastik hag a zo diduamañchou diouz doare hor yaouankizou diwar ar maez.
Diouz o doare c'hoaz, doare paotred Breiz dreist-holl, ez eo ar « sport hippique
rural » ; kenta ma vezo gelllet e vo mat kregi gantañ adarre :

Ma 'z eo mat ha talvoudus ober gant ar marc'h-houarn evit mont buhanoc'h
ha dijastreoc'h eget mont war droad pa vez ar medecin, ar veteriner, an amie-
gez da c'hervel pe eun dra bennak all evel-se, ne dalv ket da netra klask beza
barrek da vont d'ar c'hentstrivadegou. An dibab-se a dlefe beza graet gant
medisined.

Eur sport avat a zo hag a vez laosket re a gostez. E Bro ar vartoloded, eur
vro ar vor, eur vro kement e steriou enni hag e Breiz, eo souezus e vefe kement
a dud ha ne ouzont ket neuñv. An neuñverez a zo eur sport yac'h. N'eo ket
skuizus.

Hag ar gourenou ? Brudet eo Bretoned bro Skaer, Guiskri, Gourin, da veza
gourenerien kreñv hag ampart. Ar c'hoari-se a c'hellfe beza desket da holl
yaouankizou Breiz.

Evit gwir sportou diwar ar maez a rankfe beza ar re ne bellaont ket ar
yaouankizou diouz o zud, o farrez hag a ro d'ezo ampartiz hep skuizder.

Hag ar merc'hed ?

Ha ni ? a c'houlennno ar merc'hed yaouank ? Ho korf n'eo ket graet e it c'hoari football, da vihana, ha ne gavan nemet diskianterez pa lennan ez eus, er c'hériou, strolladou merc'hed oc'h en em rei d'ar c'hoari-se. Gouzout neuñv, ne lavaran ket. Mont war velo ? Ezomm a vez da ober implij eus ar marc'h-houarn. Ma 'z eo evit mont d'ar saliou-dans pe da c'hoari troiou kamm-pell diouz daoulagad ho kerent, laoskit anezañ da vergli er gêr.

C'hoariou ar c'horf n'int ket diouz doare ar merc'hed. Awalc'h o deus bet da ober wardro an ti epad ar zizun evit kaout diskuiz da sul : kana, displega peziou-c'hoari, lenn, c'hoari ar c'hartou, domino, kraoñ, setu o lod.

— Lod ar baotred yaouank e tlefe beza ivez.

Ar spered hag ar galon.

Ma ne ra netra an den yaouank diwar ar maez evit digeri e spered hag e galon da sul, pegoulz 'ta her graio ? Ha goude ma vefe e Breiz kreñva tud a zo war an douar, ar re vuana war droad pe war velo ha goude ma vefe enni gwella strollad footballerien a zo er bed, petra a rafe an dra-se evit hor gouenn ma n'o deus, an holl dud yaouank-se na spered, na vertuz ?

Daoust d'an «éducation sportive de la Jeunesse», livirit d'ñ ta ha war wel-laot eo aet hor gouenn en ugent vloaz diweza-mañ tremenet ?

Kemerit, ebatou, tud yaouank. Hoc'h oad eo o c'hemerout, re onest yac'hus, plijadurus, mat da zidui ar spered ha da lakat ar mignonij da greski etre tud an hevelep parrez hag ar parrezioù tro-war-dro.

An eva re.

Met, en an Doue hag ar Vro, n'int ket da glask repu en ostaleriou. N'eus ket suroc'h hent da goll eun den, eur familh, eur vro. N'eo ket eur ouenn a voesonerien a savetaio ar Frañs. Ken alies ho peus klevet droukprezeg a eneb an alkol ha kement a c'hellit gwelet endro d'eoec'h e zismantroù ma ne zispiegint ket d'eoec'h amañ hiroc'h diwar-benn ar si fall-se. E-lec'h mont d'an ostaleri e vefe gwelloc'h d'eoec'h mont da bourmen gant kamaladed, amañ hag ahont, da aveli ho penn, pe c'hoaz m'ho peus graet ho tibab e-touez ar merc'hed yaouank, mont betek ti ho tanvez-pried da varvailhat ganti ha gant e zud. Piu rebecho d'eur paotr ha d'eur plac'h yaouank, e sonj mont an eil gant egile, kaout evel-se darempredou etrezo a-wel d'o zud hag a-wel d'an holl.

Ar merc'hed hag o ardou.

N'anavezan ket sonjou ar baotred yaouank diwarbenn merc'hed yaouank hag a weler ken stank oc'h heuilh gizioù merc'hed kêr. Pa zellann ouz lod anezo e vevann c'hoarzin p'o gwelan gant o mourrou livet, koulz hag o jodou, o malvennou. Ha livet penaos ? Sezaig o c'horro saout, o welien a moc'h, o vaga tan ar podad, o skuba an ti, he bleo roufennet, roueslet ! O niza hag o c'houezi ! Pour e kavo amzer da zirouestla, da ziboultrenna an neiz-laou-se ?

— N'eo ket aliou ar vedisined diwar-benn ar c'hleñvedjou a vez paket oc'h heuilh ar gizioù-se, a ra diouer koulskoude ! N'ho peus ket awalc'h gant gened ho yaouankiz ? Berrat ho pleo ? Ne lavaran ket e vefe eun dra fall, rak war ar maez e vez paket kalz poultrenn, aesoc'h n'eo ken o c'hempenn. — Met roufenna, rouestli ar bleo, hag o lakat liva ouspenn ! Nann !

Ne gredan ket ez eo bleo melen ha koantiri

A lakao ar pod da vevri ;

Na nebeut e kavo eur pried 'atao

Eun den flouret brao.

(Da genderc'hel.)

L. Lok.

Seizved kantved ganedigez Sant Erwan e Landreger

*« Aotrou Sant Erwan, Paeron Breiz-Izel,
« Beza treitour d'eoec'h ? Nann kentoc'h mervel ! »*

Pet ha pet gwech, n'o deus ket tregernet e Landreger hag ar vinic'hi, ar c'homzou-se, eus kantik hor sant bras !

Tregernet o deus, dreist-holl, d'an 19 a viz Mae tremenet, a welas, e Landreger, en-dro da relegou Tad ar beorion, eur mor a dud, en o mesk Kardi-naled, Arc'heskibien, Eskibien, ebed Alvokaded, barnerien ha me 'oar me, deuet da lida seizvet kantved e c'hanedigez.

Ar Bleun-Brug en doa, warlene, kanet war an ton brasa, gousperou kenta ar gouel-mañ, ha tro hon eus bet neuze da veuli ha da embann karantez dibar, ha santelez souezus ar brudeta eus mibien Breiz.

Ra vo hon lennerien, aketus, bemdez, da bedi sant Erwan, pe Yvon, pe Youen, karget gant an Iliz da ziuall hor Bro.

Eveldañ ra vervo hor c'halon gant tan karantez Doue hag an nesa, ma raimp er bed-mañ, pep hini war e dachenn, al labour fiziet ennomp gant ar C'hrouer.



Trei a ra ar bed

Avel foll a c'houez war hor Breiz, abaoe pell zo. Araok ar brezel diweza an avel-se a oa deuet a-benn da zibrada koefou hor merc'hed yaouank.

Aet eo ar c'hiz eus ar c'hbefig gwenn er-mêz eus ar vro, e-touez ar re o deus nebeutoc'h eget tregont vloaz pell 'zo...

Kendalc'h a ra an avel foll da c'houeza, gwasoc'h avat eget biskoaz, rak mennout a ra dizec'ha a-grenn breman eienenn ar vroadelezh e kalon hor yaouankizou.

Ar re o deus tro da zarempredi an dud yaouank diwar ar mêz a wel pegen buan ez er war araok e kenver ar poent-se.

Ne ouezer ket mat a-walc'h abalamour da betra, an darn vrasa eus ar merc'hed yaouank ne fell d'ezo mui ranna eur ger brezonek.

Dallet muioc'h mui gant al lorc'hentez, ne zeblantont mui kaout aon nemet rak eun dra : beza kemeret evit payzantezed.

Paourkez merc'hedigou, karget a ardou, o deus mez o komz evel o zadou hag o mammou, truez am eus ouzoc'h o welet pegen izel ez oc'h kouezet ! Kement-se a ruihe en va spered, en deiz-all, pa welen war ar c'hazetennou, roll hir anaoiou ar baotred yaouank eus skolachou bras ar c'houarnamant, kurunet evit pennadoù labour savet ganto, e brezoneg.

Hag ec'h en em c'houlennenn perak ne vefe ket graet kement all er skolachou kristen, goude ar pezh a zo bet gourc'hemennet alies ober gant an Eskibien.

Ar Bruger.

Hon c'haozeadenn da zul

Ar zul eo devez Doue
Ha devez an ene.

*Setu ar zul, devez an Aotrou Doue. Ar c'hleier, du-hont, pell-pell, a vrall
ha a dint, a-us d'ar parkou, d'an tiez d'ar c'hériadennou, d'ar c'hériou.
Bouboul, a reont e dioukouarn an den. D'an holl e laront en o yez, en o
giz :*

An Aotrou Doue a zo Mestr war an amzer
E gemer a rafe a-bez evitan, ma karfe.
Ne c'houlenn nemet eun devez ar zun, ar zul.
An de-se 'zo binniget ; sakr eo dreist ar re-all ;
Neb a zeu d'e brofani nan eo ket didamall,
An den en deus c'houec'h devez ; ar zul 'zo da Zoue ;
C'houec'h devez 'zo d'al labour, ar zul zo d'an ene.

*Kristen, diwall da nac'h an devez-se ouz Doue. Deus d'an iliz d'Hen adori,
ha lavar : « Me hoc'h ador, o ma Doue. D'eoc'h omp holl, korf hag ene » !*

Ar zul eo devez Doue

*Devez an Hini en deus graet pep tra, en deus hadet, a vilierou, stered
aour en oabl glas ; an Hini a ro lagad lemm d'ar stered, d'al loar, d'an heol,
hag a led warnê, pa gar, mantel an noz. Deus, kristen, da zul, da veuli Doue !...*

*Deus, kristen, da zul, da drugarekaat Doue, eus an eost peus bet digantan ;
eus al lojez a lakas 'us d'it, eus da yec'hed, da beadra. Nag a baour o klask
bara, o tisirita gant an dienez hag ar baourente ; nag a glanvour oc'h uza gant
al langiz... Te 'zo evurusoc'h evit an dud-se...*

Deus, kristen, da larout da Zoue trugarez !...

Ar zul eo devez an ene

*Kristen ! Epad ar zun, peus labourer da c'honit bara, daoubleget war an
ero evel eun ejen, eul loen-korn war yeot druz ar prad. Ouspenn da gorf a zo
diouzit ; ouspenn ar c'horf-se, gwan ha kizidik, sur da goueza en poultr hag
el ludu. Pep kaera ac'hanout eo da ene, skeudenn Doue.*

*Da zul eo e labourer evit ar bed all, pa lezi war an douar da vantel-den,
da gorf, evel ma lez ar valafenn he robenn-prenn war ar c'hlaenn. Deus etre-
zek an iliz da glask sklerijenn, evel ar valafennig etrezek an heol. Distag diouz
ar bed evel an alc'houeder a sav etrezek Doue da rufla er vat hag aezen ar san-
telez ; deus da ziskuiza war galon Doue.*

*Deus, kristen, deus da zul d'an oferenn. Deus da heuilh an ofisou, oferenn-
bred ha gousperou.*

N'eo ket d'an diaoul na d'ar bed :
Santel eo ar zul war e hed ;
Ar zul eo devez Doue
Ha devez an ene.

Mignon Landreger.

Hor barzed hag hor skrivagnerien

AN AOTROU HENRY, eus LENNON

A-benn an hañv a zeu, e-doug gouelioù ar *Bleun-Brug*, e Kastellin, e vo,
war a glevomp, grêt brud en dro d'hor c'henvroiz varo eus an tolead-se hag
o deus bet skrivet kalz pe nebeut e brezoneg, yez hor bro.

Dre aked an Ao. Joz an Doare, al luc'hskeudenner gouiziek hag anavezet
ker mat-all, e vo grêt eun diskouezadeg eus portrejou ar gwir Vretoned-se
(Doue d'o fardon !). E-touez ar skeudennou a vo lakeet war wel d'an holl,
e c'hellimp gwelout, er penn kenta, hini an Ao. Kere, ar prezeger dispar bet
person e Kastellin, hag hini Jakez Riou, eus Lotei, ar skrivagner ampart a
daolennas e barrez c'hinidik en eun doare ken beo hag a zavas al leoriou kaer
anvet « Lizer an Hini Maro », « Geotenn ar Werc'hez », « Troiou-kamm Alanig
al Louarn », « Nominoe-oe », h. a. Kavout a raimp eno ivez, moarvat, skeuden-
nou Yann ar Floc'h, eus Pleiben, ar c'honter ken plijus ; Soaig Jonkour, eus
Brasparz, eur marvailher eus an dibab, ha Jean-Louis Henry, bet kannad ar
Finister er Ganbr ha mêr Lennon.

Diwar-benn an Ao. Henry eo e fell d'eomp lavarout hirio eun nebeut
komzou d'hol lennerien.

Ganet e Lokeored, Jean-Louis Henry a dremenas an darn vrasa eus e
vuhez e Kernivinenn Lennon o labourat e diegez hag oc'h entent ouz e wenan,
rak troet-bras e oa gant al loenedigou-se. Gouiziek-tre e oa war ar gwenanerez
hag aliou mat a roe d'ar wenanerien, ken e komz-plên ken e gwerzennoù, war
ar « C'hourrier du Finistère ». Er bloaz 1906 e lakeas embann, gant moulerer
ar « Bobl », e Karaez, eul leorig a c'houec'h pajenn ha tregont evit kuzulia e
genvroiz war ar gwenanerez. Anvet e oa al leorig « AR GWENAN, penoz tenna
diganto o mel heb o distruja ». Gwerzet e veze c'houec'h gwennege ar pezh.

Eur c'hristen mat hag eun den kalonek e oa an Ao. Henry, hegarat ha made-
lezus e-keñver an holl. Mervel a reas d'an 28 a viz C'houevrer 1941, ha douaret
e voe e bered Lennon, dirak eun niver bras a barrezioniz hag a vignoned dire-
det da bedi evitañ ha da lavarout d'ezañ eur c'henavo diweza.

- E-ser pleustri gant e diegez ha gant e garg a vêr-ha, diwezatoc'h, gant e
brederioù a gannad, e kavas c'hoaz an Ao. Henry an tu da zevel evit e genvroiz,
ouspenn pennadoù talvoudus war skiant ar gwenanerez, gwerzennoù hag a zo
enno eun azliou eus lavezon barzoniezh an amzer-se.

Seun ha diorbid eo ar gwerzennoù-se ha, daoust ma ne verv ket enno nerz
an *Awen*, ezint leun a boell hag a skiant-vat. Evit gwir, n'en deus ket klasket
an Ao. Henry sevel pennadoù lennek teñniet evit an dud desket-bras, tra-
walc'h a oa d'ezañ beza komprenet gant ar bobl, hag e brezoneg an holl en deus
komzet outi.

A-walc'h eo evit ma tale'himp beo en hon touez an eñvor eus ar Breton
mat-se ha ma vo roet e skouer da heulia d'hor c'henvroiz a-vremañ ken troet
d'ober fê war ar re o deus bevet arôzo ha da zilezel o roudou.



MA GWENANEG

Me 'm eus eul liorz 'dreñv ma zi
A vev meur a boblad enni.
Ne d-eo ket bras ma liorzig :
Bez ' eus enni dek lochennig.

Dek lochennig toet gant plouz,
O waskedi poblou didrouz,
O waskedi poblou munut
Hag a rofe skouer vat d'an dud.

Pep lochenn a zo eur palez :
Pep hini 'n eus he rouanez.
Eur rouanez 'n eus pep hini
Gouarnet gant he zujidi.

Houmañ, evel eur vagadenn,
A vez pasturet 'n he lochenn.
He majeste ' zo ken doujet
Ma vez he boued d'ezi pasket.

He boued d'ezi a vez pasket
'Vel d'eur bugel nevez-ganet.
Beza 'n eus eur gward eveziant
Grêt gant dimezelled yaouank.

Beza 'n eus eur gward a enor :
Diwallet eo 'vel eun teñzor.
Kement hini ' zo 'n he falez
A glask ober d'ezi al lez.

Pa zeu heol an nevez-amzer
Da bara war ar parkeier,
He bugale, e-vilierou,
A nij da furchel ar bleuniou.

Da zuna eus o c'halisou
Ar mel dous, boued an doueou,
Evit maga o c'hoarezed
A zo c'hoaz 'n o c'havel kousket

Pep hini a ra e zevel
Ha ne jom nikun dibieder.
An ti a zo diwallet mat
Gant porzierezed eveziat

En diabarz ar peoc'h a ren ;
'N em zikour ' reont an eil eben
Hag, evel c'hoarezed gwirion,
' Reont enor d'o mamm war he zron.

An urz vat, an arboellentez
Eo reolenn pep tiegez ;
Eus ar mintin betek an noz
E labouront holl hep repoz.

Ma lôned bihan, hep abeg,
Da dud en em gav skiantek,
A rofe kenteliou furnez
Evit gouarn o ziegez.

J.-L. Henry.



AIR RE A OUELOMIP

War don : Eürus an hini...

Kerent ankeniet, sec'hit ho taelo,
Ar re a ouelit ne d-int ket maro !

Nann, ne varver ket evit mont d'ar bez !
Pa n' vër ankouaet e vër e buhez...

A re a ouelit o deus troket bro,
Nemet o spered ganeoc'h a jomo.

Evit o dever, merzerien hep mar,
O eneou kaer ' zo savet d'ar c'hloar.

Ar re-ze ' zo êt en eur vro welloc'h
' Lec'h 'z eus eürusted, karantez ha peoc'h.

' Lec'h ma ne vez ket brezelioù euzus,
' Lec'h ma ne glever 'met traou dudius.

En Eternite, o fenn kurunet,
Emaint gant Doue, ar zent, an êled.

J.-L. Henry.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.
QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.F.P.P. N° 21697





Photo LE GRAND.

Kenta meiz an abati nevez a zo douget e prosesion.